

## Lettre d'information n°145 -Avril 2026

### Exposition "Lux in tenebris" Du mercredi 1<sup>er</sup> au mercredi 29 avril



Vous avez aimé *Le Nom de la rose* ? Vous adorerez *Lux in tenebris*.

Vous voilà propulsé dans un thriller/BD médiéval dont vous êtes le héros !

Muni d'une tablette et d'un casque audio, vous déambulez à la recherche des indices qui vous permettront de démasquer le coupable. En chemin vers la cour de Gaston III de Foix-Béarn, Jehan Froissart et son page (le visiteur) sont surpris par une tempête. Sans coup férir, ils prennent logis pour la nuit. Mais au village, l'atmosphère est ténébreuse. L'abbé Causas leur offre le gîte, le couvert, et partage son tourment : la veille, deux personnes du village ont été assassinées... Froissart, que sa soif de connaissance perdra un jour, décide de rechercher la vérité. Du bourreau Colas à l'accorte Anna, de Garin de Balun, le troubadour, à Philémon, le tenancier gouailleux, qui se soumettra à la question ?

Tout public dès 13 ans - Durée de l'aventure 1h

8 personnes maximum en simultané

### Café-lecture Samedi 4 avril de 10h à 12h



Vous aimez lire et découvrir de nouveaux auteurs ?

Vous aimez aussi parler de vos lectures, donner votre avis, raconter, critiquer, râler, sourire et même rire ?

Venez retrouver Fanny et Morgane pour un temps d'échange convivial !

Entrée libre - pour adultes et adolescents

### Lancement du Prix Louis Guilloux vendredi 10 avril à 18h



Cette année encore, la médiathèque participe au Prix Louis Guilloux, le prix littéraire des Côtes-d'Armor qui récompense une œuvre choisie par un jury citoyen composé de lecteurs et lectrices des bibliothèques du département.

**La sélection des dix ouvrages du Prix Louis Guilloux 2026 sera dévoilée le vendredi 10 avril à 18h lors d'une visioconférence organisée par la Bibliothèque des Côtes-d'Armor.**

Si vous souhaitez y participer, demandez-nous ou retrouvez toutes les informations sur le site internet de la médiathèque.

## Atelier cinéma "animation sur tables lumineuses" samedi 18 avril à 14h30



À partir de papier blanc ou coloré, poudres et sable, les enfants et adolescents sont invités à créer une histoire, puis à l'animer, image par image. La table lumineuse permet de jouer avec les ombres, les lumières et les matières !


Sur inscription au 02 96 44 06 60

(ouvert aux adultes accompagnateurs)

À partir de 7 ans - Durée 2h

Avec l'Union Française du Film pour l'Enfance et la Jeunesse


## Heure du conte : un mercredi sur deux à 15h A partir de 4 ans



**Mercredi 1<sup>er</sup> avril**

**Conte : « L' ogre Baborco » / Muriel Bloch**

Il y a longtemps, en Sardaigne, vivait un ogre. Il s'appelait Baborco. C'était un ogre énorme et il dévorait tout sur son passage. Les parents tremblaient de peur pour leurs enfants.



**Mercredi 15 avril**

**Pause-lecture sur le thème de l'Afrique**


*On dit que... « un homme sans culture ressemble à un zèbre sans rayures ».*



**Mercredi 29 avril**

**Conte : « Din'Roa la vaillante » / Jean-Louis Le Craver**

Il y a très longtemps, vivait en Chine une petite fille bien dégourdie qui s'appelait Din'Roa. Elle vivait dans la campagne avec sa mère et son petit frère.



Médiathèque de Guingamp  
1, Place du Champ-au-Roy  
22205 GUINGAMP Cedex  
02 96 44 06 60  
[mediatheque@ville-guingamp.com](mailto:mediatheque@ville-guingamp.com)  
<http://mediatheque.ville-guingamp.fr>

## Lizher-kelaouiñ niv. 145 - miz Ebrel 2026

### Diskouezadeg "Lux in tenebris" Eus ar Merc'her 1 d'ar Merc'her 29 a viz Ebrel



Plijet eo *Le Nom de la rose* deoc'h ? Sot e vefet gant *Lux in tenebris*.

Lakaet e vefet da vezañ haroz un istor spont/BT e-kerzh ar Grennamzer !

Mont a refet da vale, un dablezenn hag un tokarn selaou ganeoc'h, evit klask merkoù hag a sikouro ac'hanoc'h da c'houzout piv eo an den kablus. Emañ Jehan Froissart hag e floc'h (ar gweladenner·ez) war an hent da vont da lez Gaston III de Foix-Bearn met harzet int a-daol-trumm gant ur gorventenn. Kavout a reont ul lec'h da lojañ evit an noz, hep tamm poan ebet. Met gwall deñval eo an aergelc'h er gêr vihan-se. Bod ha boued zo roet dezhe gant an aotrou beleg Causas a zispleg pegen glac'haret eo : an derc'hent e oa bet drouklazhet daou zen er gê-se... Froissart zo un den pitilh gant ar c'hoant gouzout ha graet eo e soñj gantañ : diluziañ a ray an afer. Colas, ar bourev, Anna, ar vatezh, Garin da Balun, an troubadour, Philemon, dalc'her goapaer an ostaleri... piv a vo jahinet ?

Evit an holl adalek 13 vloaz - An abadenn a bad 1e

8 den d'ar muiañ er memes koulz

### Kafe-lenn Sadorn 4 a viz Ebrel eus 10e da 12e



Plijout a ra deoc'h lenn hag ober anaoudegezh gant skrivagnerien nevez ?

Kaozeal diwar-benn ho lennadennoù a blij deoc'h ivez, reiñ ho soñj, kontañ, burutellañ, grozmat, mousc'hoarzhin ha c'hoarzhin memes ?

Deuit da gontañ kaoz gant Fanny ha Morgane ur pennadig !

Mont e-barzh frank - evit an dud vras hag ar grennarded

### Reiñ lañs d'ar Priz Louis Gwilhouz d'ar Gwener 10 a viz Ebrel da 6e



Ar vediaoueg a gemer perzh er Priz Louis Gwilhouz ar bloaz-mañ c'hoazh. Ur priz lennegel gant Departamant Aodoù-an-Arvor eo evit enoriñ un oberenn dibabet gant ur juri ennañ tud a bep seurt kemeret e-mesk lennerezed ha lennerien eus levraouegoù an departamant.

**Embannet e vo titloù an dek oberenn dibabet evit ar Priz Louis Gwilhouz 2026 d'ar Gwener 10 a viz Ebrel da 6e, e-pad un emvod a-bell aozet gant Levraoueg Aodoù-an-Arvor.**

Ma faot deoc'h kemer perzh e c'hallit goulenn ganimp, pe mont e lec'hienn internet ar vediaoueg ma kavfet an holl ditouroù.

## Atelier sinema "bevaat war taolioù goulaouiñ" Sadorn 18 a viz Ebrel, da 2e30



Ar vugale a vo lakaet da grouiñ un istor ha da bevaat anezhi skeudenn-ha-skeudenn goude-se, gant paper gwenn pe livet, poultr ha traezh. An taolioù goulaouiñ zo graet evit c'hoari gant ar skeudoù, ar gouloù hag an danvezioù !


Ret eo lakaat hoc'h anv a-raok en niv. 02 96 44 06 60

(digor d'an dud deuet a ambroug ar vugale)

Adalek 7 vloaz - Padout a ray 2e

*Asambles gant Unvaniezh Frañs ar Filmoù evit ar Vugale hag ar re Yaouank*


## « Ur wech e oa... » : bep eil Merc'her da 3e goude merenn Adalek 4 bloaz



**Merc'her 1 a viz Ebrel**

**Kontadenn : « L'ogre Baborco » / Muriel Bloch**

Gwechall e oa ur roñfl o vevañ e Sardigna. Anvet e oa Baborco. Ur roñfl divent e oa ha debriñ a rae kement tra a gave war e hent. An dud a grene gant ar spont evit o bugale.



**Merc'her 15 a viz Ebrel**

**Ehan lenn war tem Afrika**

*Diouzh a vez lavaret... « un den hep sevenadur zo evel ur rouden-neg diroudenn ».*



**Merc'her 29 a viz Ebrel**

**Kontadenn : « Din'Roa la vaillante » / Jean-Louis Le Craver**

Gwechall-gozh e Sina e veve ur plac'h vihan digourdi hag a oa anvet Din'Roa. Bevañ a rae war ar maez gant he mamm hag he breur bihan.